

Pilven Le Sévellec. Gwiseni 1842 – Pariz 1924.
Modernnaet eo bet an doar-skriva.
An dervenn goz 1912.

An dervenn goz

Gwechall, pa daole an dervenn
En-dro dezi, nerzuz he fenn,
A-dreuz, a-hed, he skourrou glaz,
Laboused Breiz a-strolladou
A blave war he divreh braz
‘Vid sutal a-hwitelladou.

Neuze avelig flour an hañv
O luske ; amzer rust ar goañv,
An erh, an arne hag ar glao
War ar wezenn en he hozni
‘Zo kouezet. He halon atao
Avad, ‘zo chomet beo enni.

Dioh an dervenn goz, dispennet,
Al laboused ne dehont ket :
Evelkent e teuont a-bell
Da blava war he skourrou noaz.
Ken laouen ha trouz diouaskell
En o hreiz a vez klevet c’hoaz.